

1

Indan an egorlestr, difiñv-kaer en oabl, evel un gevnidenn en-istribilh ouzh he neudenn diwelus, e trese an avel gwagennoù war ur mor a blant. Dre-holl, war-hed gwel, ar memes plant, glas gant bleuñv gwenn tener, o hejañ-dihejañ goustadik diouzh lusk c’hwezhadennoù an avel : ed-du. Ed-du o c’holoiñ plaennoù diziwezh, ed-du o sevel gant rozioù an tosennoù izel, ed-du o c’hronnañ lennoù o dourioù glas-sklaer : ed-du nemetken.

— Erru omp, Bob. Sed-amañ Eda, planedenn an ed-du.

— Gwelet a ran, Mike, gwelet a ran, a respontas Bob, azezet klok en e gador-vrec’h, el logell leviat. Planedenn an ed-du eo, sur ha n’eo ket marteze ! War a welan n’eus na gwezenn na netra all ebet amañ ! N’eo ket divalav da welet, ’vat, met memes tra... Ur blantenn roz ruz amañ, ur wezenn avaloù aze, ur vodenn gelvez ahont... Da cheñch un tamm. Ober a rafe sederoc’h, ha bravoc’h, ne gav ket dit ?

— Bob, n’omp ket deuet amañ da lavaret pe eo brav pe eo vil ar blanedenn-mañ ! N’eo ket ur staj liorzhañ omp deuet d’ober ! Bez sirius un tamm, mar plij. Labour hon eus.

Evel-just. Pa veze kaset Mike Skouarneg ha Bob Danteg, gwellañ poliserien an egor, d’un tu bennak, ne oa ket evit farsal e oa. Enne e veze fiziet an aferioù

luzietañ, dañjerusañ. Da nebeutañ pa ne veze den all ebet da lakaat en o flas.

En dro-mañ e oa grevus an traoù. Abaoe ur pennad e oad krog da welet, un tamm e pep lec'h dre ar Republik Veur, ed-du nevez gwerzhed er stalioù, war ar marc'hadoù, e-kichen, pe e plas an ed-du ofisiel. Ne ouie den eus pelec'h e teue an ed-du-se.

Darn a lavare ne oa ket an ed-du nevez-se kenkoulz hag egile, ha kontet e veze c'hoazh e oa bet manet tud klañv, ha marvet darn zoken, goude bezañ debret anezhe. Petra teufe gouenn Mab-den da vezañ ma n'halle ket an Dud debriñ krampouezh ed-du ken, na kig-ha-fars, na fars-forn, na pouloud na netra ?

Ma ne veze bet nemet ar gudenn yec'hed-se, ne veze ket bet re drubuilhet ar pennoù bras, aotrounez ar gouarnamant. Met un dra all a oa : krog e oa ar stad da goll arc'hant gant an istor-se. Kar gwelloc'h marc'had e oa an ed-du nevez evit an hini ofisiel, an ed-du stad, gounezet war ar planedennoù gouestlet da se, an ed-du nemete aotreet er Republik. Hag evel-just e veze prenet muioc'h-muiañ eus an ed-du nevez-se, pa ne oa ket ken ker, hag a-blasoù e chome an ed-du stad da vreinañ er magazennoù.

Re oa re. Poent e oa ober un dra bennak. Kavout eus pelec'h e teue an ed-du diaotre-se ha lakaat un termen d'an trafik.

— Ma ! Da belec'h 'eomp bremañ ? a c'houlennas Bob, en ur echuiñ e werennad chistr.

— Gortozet omp e Kêr-Ed Unan gant Renner Meur Eda, aotrou Bob, a respontas ur vouezh vihan. Ankouaet ho poa ?

— 'Moa ket, 'moa ket, a lavaras Bob en ur c'hrozmolat.

Trugarez, Jennifer. Memes tra, Mike, a gendalc'has a vouezh izel en un dreññ etrezek e geneil, azezet en e gichen, ne gomprenan ket abalamour da betra eo bet roet deomp an asez roboplac'hig-se e-lec'h ur roboden normal ! N'omp ket deuet amañ da c'hoari merc'hodennoù !

— Degas a ran d'ho soñj, aotrou Bob, ec'h on ur roboden kenkoulz ha forzh pehini, evidon da vezañ bihan ! a respontas Jennifer, hag he doa klevet mat-tre komzoù ar paotr.

— Diwall, Bob, a lavaras Mike en ur vousec'hoerzhin. Feukidig eo Jennifer, ha lemm eo he skouarn ! Lavaret 'm eus bet dit, c'hoazh : un dra bennak zo aet a-dreuz e-kerzh he c'hresk, ne ouezer ket petra, ha chomet eo bihan, met desket eo kenkoulz hag ur roboden bras. Se zo bet lavaret din e Kevrenn ar Robotud Polis, atav.

Erru e oa bras perzh ar robotud er gevredigezh. N'halle den ebet soñjal tremen hepte. Kavet e vezent e pep lec'h : darn implijet evit derc'hel kempenn an tier, darn all er stalioù, barrek war ar c'honterezh, re all c'hoazh evit ober war-dro ar vugale... Hag evel-just e oa ivez robotud polis, desket bras war ar yezhoù niverus komzet er Republik Veur, war an urzhiataerezh, al lezennoù, hag all.

Ne oant ket robotoù difeson, bernioù houarn distumm na oant heñvel ouzh tra ebet evel ma veze gwelet gwechall gozh, e penn kentañ ar pevare milved. Nann. Robotud e oant, heñvel-bev ouzh forzh peseurt den all, nemet e oant graet gant metal. Kresket e oa bet a galz niver ar robotoù er gevredigezh adalek ma oa bet kavet an doare da broduiñ anezhe didorr ha buan-tre : ne oa nemet pourveziñ an danvez ac'h afe da sevel anezhe d'ober, ha goude-se e kreske pep robot e-unan, evel forzh peseurt den gwir. Da gentañ e vezent heñvel ouzh ur poupig,

ha neuze e kreskent betek tapout stumm un den gour. Kement-mañ indan daou viz. Evezhiet e veze o c'hresk memes tra gant robotud all, karget da reiñ dezhe an deskamant o defe ezhomm anezhañ war-lerc'h evit al labour a vefe roet dezhe. Kuit a uzinoù bras, a ijinourien, a vicherourien evel gwechall. Adalek neuze e oa bet tapet ar pleg d'ober *robotud* anezhe.

Bihan e oa chomet Jennifer, daoust m'he doa desket tout ar pezh a oa sañset deskiñ. Stumm ur grennardenn e-tro trizek pe bevarzek vloaz a oa ganti. Petra 'oa c'hoarvezet ? Diaes e oa gouzout. Re nebeut a houarn en he boued, moarvat...

— Erru omp e Kêr-Ed Unan, aotrou Mike, a gemennas Jennifer.

Gallout a raent gwelet, indan o lestr, un toullad savadurioù bras ha gris, savet tost an eil d'egile, evel un enezenn e-kreiz ar mor ed-du : darn a oa magazennoù bras, darn all tier-annez, hag unan all, uheloc'h eget ar re all, skrivet Kêr-Ed Unan war e doenn, a oa ti ar burevioù, sez ar Renner Meur.

Tud a oa o labourat er-maez, o vediñ, hag ivez pezhioù loened blevek ha kornek, un hanter vrasoc'h eget al loened a veze graet olifanted anezhe, gwechall gozh.

— Ya, mat eo, Jennifer ! Gouzout a-walc'h a ran ! Me an hini eo levier al lestr, memes tra ! a respontas Mike Skouarneg, rust un tamm.

— Mat-tre ! Mall zo warnon gwelet rener ar stalig-mañ ha klevet ar pezh en devo da lavarout deomp ! a gendalc'has Bob. Ha dreist-holl, gant tout ar pezh a zo tro-dro deomp amañ, moarvat e kinnigo ur grampouezhenn bennak deomp. Naon du 'm eus !

2

Un degemer mat a reas Rener Meur Eda dezhe. Azezet e oa en ur mell kador-vrec'h, ouzh e vurev. Ur penn ront war ur c'hof ront koachet indan ur sae ruz-skarlek, daouarn kuilh. A-dra-sur ne oa ket bevet ar Rener Meur diwar ed-du nemetken. A-drekañ, ur prenestr bras a skoe war ar parkeier ed-du diziwezh ac'h ae ar gwel anezhe da goll en oabl glas.

— Degemer mat deoc'h war Eda, aotrounez ! emezañ gant ur minc'hoerzh ledan, en ur ober sin dezhe da vont en o c'hoazez war ar c'hadorioù dirak e vurev. Ha degemer mat deoc'h e Kêr-Ed Unan ! Ur skeuden zo bet kaset din eus ar gêrbenn, just a-walc'h, da lavarout din e oac'h o tont. Beaj vat ho peus graet ?

— Mat-tre. Ur veaj didrubuilh, trugarez aotrou... eee... a grogas Mike da respont.

— Kêrgoad. Douglas Junior Kêrgoad eo e anv, a lavaras Jennifer dezhañ a vouezh izel, o tont war e sikour.

— ... aotrou Kêrgoad, a gendalc'has Mike. M'ho peus bet ur skeuden ec'h ouzoc'h, moarvat, da betra omp deuet amañ ?

Teñvalaat a reas penn ar Rener. Kroaziañ a reas e zaouarn dirak e c'hroñj ha respont :

— Ya. Evel-just. Afer an ed-du nevez. Na mantrus eo ! Daoust piv a gred ober an dra-se ? Gwerzhañ an ed-du faos-se, ed-du fall, diaotre ! Mezhus eo !

— Evit faos n'eo ket, aotrou Pennkoad, a reizhas Bob. Ed-du gwir e seblant bezañ, met ar wirionez zo ganeoc'h pa lavarit eo fall. Pe, da nebeutañ, n'eo ket koulz hag hoc'h ed-du amañ.

— Evel-just ! a lavaras an aotrou Kêrgoad, fougennañ. N'eus ket par d'an ed-du o tont eus ar blanedenn Eda ! Nag hini Ede, nag hini Edi, nag hini Edo, n'eus ket ed-du ken mat hag hini Eda ! Hag e lavaran an dra-mañ hep fougasiñ !

— Hag Edu ? a c'houlennas Mike, ken diseblant ha tra.

— Ya, ya. Marteze a-walc'h eo gwelloc'h ed-du ar blanedenn Edu, a rankas ar Rener anzav, hegaset un tamm. Met douar gwelloc'h o deus, eno, ivez.

— Ar pezh ec'h omp o klak gouzout, dreist-holl, aotrou Kêrgoad, evit kregiñ, a gendalc'has Mike, eo pelec'h o deus gallet an drafikerien kavout had. An ed-du nevez-se n'int ket deuet evel-se, diwar netra. Dre ret e teu o had eus unan eus ar planedennoù ed-du ofisiel. N' ho peus ket gwelet pe klevet un dra bennak, amañ war Eda, hag a c'hallfe lakaat ac'hanomp war roudoù an drafikerien ?

— Netra, a lavaran deoc'h ! Seurt ebet ! a respontas ar Rener kerkent war un ton asur. N'eus nemet tud vat, onest, pe e vefe amañ e Kêr-Ed Unan, pe e Kêr-Ed Daou, Kêr-Ed Tri pe e lec'h all war ar blanedenn ! Ha dre ma 'c'h on-me Rener Meur am bije gouezet diouzhtu ma vije bet remerket un dra direizh bennak, pe c'hoarvezet un darvoud divoutin war Eda. War Edi pe Edo, avat, e vefe laoskoc'h an traoù, a-hervez... N'am eus ket c'hoant da vezañ teod fall, evel-just, na da lakaat da grediñ ne ra ket mat ma c'heneiled o labour eno, met... Mar karit, aotrounez, e kinnigan deoc'h dont ganin d'ober un tamm

tro da welet penaos ec'h a an traoù en-dro e Kêr-Ed Unan. Evel-se e welfet hoc'h-unan e vez graet ul labour sirius amañ, ha n'hall ket ar gudenn dont ac'hann.

— Un mennozh mat-tre eo, aotrou Renner, a asantas Mike. Dres ar pezh e oamp en sell da c'houlenñ ganeoc'h.

Tra ma oant o kuitaat ar burev e tostaas Bob ouzh Mike da c'houlenñ gantañ, e pleg e skouarn :

— Ha neuze, petra 'soñjez eus Toullgoad-se ?

— Kêrgoad ? N'ouzon ket re c'hoazh. Ur feson onest zo gantañ, a gav din. Marteze eo re sur anezhañ pa lavar ne c'hoarvez netra amañ hag e c'haller kaout fiziañs e kement hini zo o labourat e Kêrioù-Ed Eda. Marteze ne oar ket tout. Hervez an dielfennadurioù hon eus bet gant Burev ar Skiantoù Polis eo sur ec'h eo an ed-du diaotre a-orin eus ar planedennoù ofisiel. Gallout a rafe bezañ Eda kenkoulz hag ar re all.

— Ya, me 'm eus disfiz a-walc'h ouzh an den-se. Soñj 'ta ! Pegeit omp bet en e vurev ? Ha n'en deus kinniget na tamm na bannac'h ebet deomp c'hoazh !

En em gavout a reas ar strollad bihan, Bob, Mike ha Jennifer, ambrouget gant ar Renner Meur, er-maez, war vord ur parkad ed-du ma oa tud o labourat, gant unan eus al loened bras-kenañ o doa remerket a-raok pradañ, en ur erruout e Kêr-Ed Unan. Unan eus al labourerien, un nannden, teñval e groc'hen noazh betek e zargreiz, a oa pintet war chouk al loen hag en kase evel-se. Dre ma 'c'h ae e stleje al loen bras d'e heul laonnennoù hir hag a falc'he an ed-du, dastumet gant nanntud all ha karget kenkent e-barzh kirri bras staget ouzh loened all eus an hevelep gouenn.

— Souezhet on un tamm, aotrou Kêrgoad, a lavaras

Mike. Me a soñje din e veze labouret gant mekanikoù, gant ostilhoù bras...

— Gant mekanikoù ? Gant ar mamotoured n'eus ket ezhomm mekanikoù ! a respontas ar Rener, fent gantañ en e vouezh. Digoust int. Ne chomont ket sac'het gwech ebet. Un tamm plouz ed-du dezhe da zebriñ, ha mat eo jeu ! Gwelloc'h eget mekanikoù, me 'lavar deoc'h !

— Ar mamotoured ? a c'houlennas Bob.

— Evel-se e vez graet eus al loened-se, eme ar Rener en ur ziskouez al loen divent a zalc'he da vont war-raok, plaen ha sioul, en ur hejañ trañkil e gerniel ramzel a-gleiz hag a-zehoù. Kavet hon eus mat mirout anezhe, goude an Naetaat, ha kement-se n'eo ket hanter ober.

— Hon digarezit, aotrou Rener, a lavaras Mike, met bezit sklaer ha resis, mar plij. Petra eo an Naetaat ?

— An Naetaat, a respontas Jennifer a-raok ar Rener, eo ar c'hentañ tra a vez graet war ur blanedenn goude bezañ divizet gant ar Republik Veur da betra e servijo ar blanedenn-se, da lavarout eo lemel kuit kement tra na vo ket ezhomm anezhañ.

— Mat-tre, plac'h vihan ! a gendalc'has ar Rener gant ur minc'hoerzh, hep taoler pled ouzh selloù du Jennifer, feuket adarre. An dra-se eo, dres ! Dre ma oa bet dibabet Eda evit produiñ ed-du evit ar Republik, kaerat kefridi ma zo unan, hon oa bet kalz a labour amañ gant an Naetaat. Ret e vije deoc'h bezañ gwelet penaos e oa gwechall, pa oamp degouezhet ! Gwez uhel ha plant a bep seurt a vil vern e pep lec'h dre ar blanedenn ! Ha loened, ma Doue ! Poan ho pije o krediñ pet seurt loened disheñvel a oa amañ ! Traoù didalvoud tout ! Ha menezioù, ha traoñiennoù... Nag a labour evit en em zizober eus an holl draoù gouez-se, ha plaenaat gorre ar blanedenn en

ur mod dereat a-benn kaout parkeier kaer evel ma welit bremañ ! Ul labour start, met ul labour vray eo bet an Naetaat, war Eda. Hag evel ma oan o lavarout deoc'h, e-mesk an holl spesadoù loened a oa amañ a-raok hon oa divizet mirout ar mamotoured. Gwelet e oa bet diouzhtu e c'hallfe al loened kreñv-se servijout deomp.

— Nag Edaiz ? a c'houlennas Bob c'hoazh. Penaos o deus degemeret an holl cheñchamantoù-se ? Pe ne oa ket a annezidi war ar blanedenn, marteze ?

— Boa, 'vat ! Ur boblad nanntud a veve en o c'hoadeier, hep sevenadur gwir na netra. Soñjit 'ta, n'anavezent ket ar c'hrapouezh ed-du a-raok ma oa erruet an Dud amañ ! Ar Republik Veur, dre he madelezh, he deus laosket anezhe da vevañ war o flanedenn, ha roet labour dezhe, zoken, hag int eo a ra war-dro ar mamotoured hag an darn vrasañ eus al labourioù er parkeier, bremañ. Evel-just ez eus bet unan bennak anezhe o deus bet poan o kompren pegen bras e oa ar vad degaset dezhe, pegen bras e oa o chañs o resev sevenadur ar Republik Veur ken brokus, int hag a veve a-raok evel loened er c'hoadoù... Ranket hon eus lazhañ un toullad, siwazh, met bremañ ec'h a mat an traoù. Sellit oute, an nanntud keizh-se, e-leizh a blijadur gante o labourat evit magañ Tud ar Republik !

— Evel-just, evel-just, aotrou Kêrgoad, gwelet a ran, eme Mike. Met n'ouzon ket petra zo kaoz, n'ouzon ket hag-eñ am bo kement a blijadur o tebriñ ma c'hrapouezh ed-du, bremañ...

— Evel ma c'hallit gwelet, a gendalc'has ar Rener, n'eus netra direizh amañ. Deomp, mar karit, da welet pelec'h e vez kaset...

Troc'het e voe e gaoz gant ur vlejadenn hir ha boud laosket gant ar mamotour a oa o labourat er park. An

edaad pintet war e chouk a droas kein da huchal un dra bennak, en ur yezh dianav d'ar boliserien.

— A ! eme ar Rener. Diwallit ! Lakait buan ho maskloù !

Hag eus ur c'hodell en e sae e tennas ur maskl hag e lakaas anezhañ war e benn.

— Hon maskloù ? a c'houlennas Bob, souezhet. Peseurt maskloù ? Oc'h ober petra oc'h ?

— Petra ? a lavaras ar Rener, mouget e vouezh un tamm, a-drek e vaskl, selloù mantret gantañ. N'eus ket bet roet maskloù deoc'h ? Met...

Ne voe ket klevet peurrest e gomzoù gant Mike Skouarneg ha Bob Danteg. Amzer o devoe, a-boan, da welet ur pikol tra du o tont dre greiz pastelloù al loen blevek ramzel, ma kavas dezhe e oa troet an aer vat a oa tro-dro dezhe kent en ur gaz pounner ha fetis, ampoezonet, flaerius, ken flaerius ma oa dic'houzañvus. Kouezhañ a reas an daou boliser war an douar, semplet.